

YF_0050_Son Koad Keveran

War evan eur chopinad chistr e-barz penn eur varrikenn
E oa savet eur batailhon e-barz koad Keveran

E-barz ar ger a Goad Keveran e oa savet eur facheri
Dre ar merc'hed a faote dezo dond da gomandin

Deuet e oa an teir blac'h hag an teir gomer
Da esaein da gomandin an tad, ar bambocher

Med heman en-doa teod hag a respontas dezo
Me am-bo boeson da evan keit ma hallin gounid

M'am-eus me foetet eun nebeud gwenneg e-barz an ostaliri
Me am-eus bet tammigou poan o hounid anezo da zebrin

An delikatan plah yaouank a oa e-barz ar barrez
Aet e oa hi da Gastelin evid ober eun test faoz

E-barz Kastelin pa oa erru, diganti e oa goulet (goulet = goulennet)
Na petra 'ta plah yaouank e-barz koad Keveran az-peuz gwelet

Na petra 'ta plah yaouank e-barz koad Keveran az-peuz gwelet
Ha hi a respontas raktal «dent e wreg en-eus torret»

Setu eman kondaonet an contr a-enep eta d'ar wirionez
Marteze en-no muihoh chans en amzer da houde

Ha ba beg ma fuzuilh ma en-eus bet laret hi
Kas anezi ganin da vourh Sant-Hern, d'ar sekretaer maeri

O sonjal kondaonet ahanon ar rest deuz ma buhez
Med trawalc'h en tribunal am-eus bet lavaret

Bez am-eus c'hoaz eun tantin goz a jom e-barz memez ker
Ha bep sadorn ha bep gwener ez a hi da Zant-Salver

P'eman erru e-barz an iliz, hi en em lak en daoulin
Hag e kroaz he daou zorn hag e krizo he min

Pa oe echu he zroiou neuze e teuas d'ar ger
Evid d'ober he aered etrezeg an Abilouer

A-benn ma teuas e-barz an ti, hi a gomans direzon
Eno en em gav kement gwrac'had a zo e-barz ar hanton

Dre ma teu e-barz an ti, azezet war ar charnell
A-benn ma teu an contr d'ar ger, piket mad e jupenn

Pa oa echu ma 'funision on-me deuet c'hoaz d'ar ger
Evid lared ar bonjour da Vari ma homer

Pa oan erru e-barz toull an nor ennan e oen aretet
Ha am-boea goulet diganti ha plaz a oa da gousked

Ha hi a respontas raktal « Setu ho tilhad aze
Ha deus eta e-barz ho kwele evel en amzer tremenet »

Pa oan aet e-barz ma gwele, n'oan ket c'hoaz kousket mad
Me a glev ano an hini bihan, e ano a oa Leda

P'am-boea klevet kement-se e oan chomet souezet

Rag pa oan aet deuz ar ger, hennez ne gaoze ket

Me ho ped paotred yaouank, pa 'z it da glask merhed
Na glaskit ket eur gemenez, selaouit me ho ped

Rag ar re-se raio krafou hir deoh e-barz ho tilhad
E pelech eno plaz al laou doned en em guzad